



Liv loen korf tra

Fichenn savet gant Silvenn Koant

Evit piv?

Adalek ar CP en ur sal vras pe er maez

Talvoudegezh ar c'hoari

Adwelout anvioù al livioù, an dilhad, ar c'horf, an traoù, al loened
Bezañ aketus

An dafar

ur volotenn

Mont en-dro ar c'hoari

Ur c'helc'hiad a vugale en o sav.

Rener ar c'hoari a ya e-kreiz ar c'helc'h ar vell gantañ.

Stlepel a ra ar volotenn d'unan er ront en ur c'houlenn : pe "ul liv", pe "ul loen", pe "un dra", pe "ar c'horf", pe "dilhad" hervez ar pezh 'zo bet desket.

An hini en deus bet ar volotenn a respont diouzhtu en ur lavarout un anv eus ar seurt goulennet :

Ul liv : melen

Ul loen : ar vran

Un dra : ar gador

Ar c'horf : an dorn

An dilhad : ar bragoù

Mar 'd eo mat ar respont, an hini a oa e-kreiz, a gemer plas hinier ront, hag egile a zeu e-kreiz gant ar volotenn da sevel ar goulenn digant unan all.

Lakaet e vez er-maez, pe roet en-dro ar volotenn d'an hini a oa e-kreiz, pe lakaet da azezañ war ar c'helc'h e-pad ur pennad an hini ne gav respont ebet pe an hini a ra ur fazi da lavarout eo adlavaret ar pezh zo bet lavaret dija gant unan

Evezhiadenn

Da deurel evezh evit ma ne vefe ket lâret re alies memes ger.